


... Lavar din piv eo an hini bravañ !

Er c'hontadennoù kozh e klever anv eus melezourioù burzhudus, hag a oar komz gant neb a sell ouzh e skeudenn ennañ. Hini Titeuf, siwazh dezhañ, n'eo ket burzhudus, ha marteze memes e vefe milliget... C'hoant en defe da welet hag-eñ e tegouez brav e droc'had-blev gant e votoù, met diouzh lec'h m'emañ ne c'hell ket gwelet e skeudenn penn-kil-ha-troad er melezour. Ma 'z a div gammed pe deir war e gil, daoust hag-eñ en do muioc'h a chañs da zont a-benn da welet e skeudenn en he fezh ? Peotramant biken ne teuio a-benn ?



Ar skeudenn a weler er melezour a seblant taolenniñ Titeuf en ment gwir. En gwirionez n'eo nemet un touell : sellet ouzh e skeudenn en ur melezour a zo memestra ha sellet ouzh e zoubl plaset d'ar memes hed a-dreñv ur sklasenn (tresadenn dindan). Ment "gwir" e skeudenn evel ma wel anezhi war ar melezour a zo neuze an hanter eus e vent gwir dezhañ ! Teorem ar c'hreizoù eo a lavar an dra-se. Kaer en do Titeuf kilañ, re vihan atav ar melezour... Dav vo dezhañ kavout unan all, hag a vo e uhelder da nebeutañ an hanter eus e vent.

Ma ne gredit ket, grit ar muzulioù : muzul uhelder skeudenn ho penn war ar melezour ; ha goude muzul uhelder gwir ho penn...

